

4

CANTIK SANT ALER

VAR DON : *Kals amzer am beuz kollet.*

1

Aeled euz ar Baradoz, oll sperejou euruz,
C'hui pardonnerien devot, tud leun a feiz nerzuz,
Uhanit ganomp ho mouez da veuli sant Aler
A neuz bet digant Doue grasou braz peb amzer.

Diskan.

O sant Aler benniget, c'hui a bedo Doue
Evidomp, hag evit Breiz, evit ho pugale.

2

A gartel/ Limoj zavet, kelennet gant sourci
Desket dezhan bihannig clask Doue ha zenti,
Ar c'hrouadur a zeu buhan, den fur ha parfet braz
Dre ma avance en oad, he vertuz a grescaz.

3

Ty eur mecherour leal, oa casset sant Aler
Da ziski but marechal, pe guel armurier,
He zeveriou a gristen, penn-da-benn a heuille ;
Evel an oabl glaz, oa pur he galon, he ene.

4

En Iliz, en œvrou mad 'tremene he zuliou
Var he labour d'ar pemdez, da verrat he boaniou
E kinnige da Zoue euz he dal ar c'huezen
He labour e guirionez oa bepred eur beden.

5

Meuli he vertuziou braz, ar roue pa glevaz
Labour priciuz d'ober, dezhan a zigassaz
An danvez oa eur pezh aour, metal euz ar c'henta
'Vit tailla de Zagobert, eun trôn euz ar c'haera.

6

Gant Doue sklereet Al-er, ijinus ahen-dall
Eleac'h eun trôn a ra daou, euz ar memez metal.
Dagobert oll estlammet o vellet al labour
Ractal a gemer ar zant 'vit kenta mecherour.

7

Respectet gant an holl bobl, er garg-se ken neve
Dont a ra da vut e ber, cuzulier ar Roue ;
Roit a zo dezhan eun ty, eun niver a vadou
He oll vad a raun d'ar paour, evit he ezomou.

8

'Kreiz kemet a enoriou, he galon oa bepred
Distag euz ar vanite, mamen euz ar pec'het.
An humilite guirion na gar ket enoriou,
Ha Sant Aler a glaske kuza he vertuziou.

Dilezel a reaz ar bed, 'vit n'em roi d'ar studi;
 He skiant ebars nemeur oa skler da bep hini
 En despect d'he volesti, eo gret escob Noyon
 Ag ar zant a jom bepred, dous hag humbl a galon.

Gouarn a ra he escopi, gant eur santelez vraz
 Beteg devez he varo ken humbl evel biscoaz.
 Da zec vloaz-ha-triugent, carget a veritou
 E quittaz an draônien-ma, evit mont d'an Envou,

E Guiscriv zo eur chapel, zavet en he enor
 Darempret gant calz a dud, dreist-oll re an Arvor
 Gant kezec a vandennou a veler bep bloavez
 O visita el leac'h-se tud euz a bep parrez.

Ar pelerin n'eur velet an tour santel a bell
 A zalud var he zaoulin ar groaz euz he chapel ;
 Eur chapeled en he zorn a ra procession
 Goude-~~ez~~ ia d'ar feunteun n'eur bedi a galon.

Dour ar feunteun ker brudet en deuz galloud meurbed
 Da brezervi ar c'hezec eur goalheur ha clenved ;
 Pedomb eta sant Aler, 'vit al loened labour
 A zo carget deiz-ha-noz gant Doue d'hor zicour.

Kerzit Breizis, ma bredeur, kerzit en hann Doue,
 It da chapel sant Aler, it 'ta heb digare;
 Da c'houel sant Yan Badezour, devez he bardon braz
 G'hui o pezo diganthan grasou ha grasou c'hoaz.

Ha c'hui pennou-tiagez, bem noz ha bep mintin
 Da brezervi ho kezec, pedit ho medicin
 Sant Aler evit an holl — Labourer, mecherour
 En deuz bepred n'he galon carantez ha zicour,

Var hon daoulin, sant Aler, ho pedomb Guiscrivis
 Ni hag ar re glasc zicour genoc'h en ho Iliz,
 Kendalc'hit, patron caret, da skuill ho benoziou
 Ken stank ha ma couezar gliz d'an haon var an deliou.

Permis d'imprimer :

Quimper, le 15 juin 1880.

DU MARHALLAC'H, *etc. gén.*